

Al Liamm ker,

Gourc'hemenoù evit ho labour !

Setu 28€ evit koumanantiñ d'ho kelaouenn daouviziek.

Setu ivez un nebeud evezhiadennoù diwar-benn doare-skrivañ ho kelaouenn hag hon eus kavet talvoudus a-walc'h da gas deoc'h ha d'ho lennerien.

Diwallit gant implij ar c'hlochedigoù « » " " " ". Klochedigoù a bep seurt a vez kavet e-barzh ho pennadoù : « » a zo ar c'hlochedigoù gall (daouankoù), " " pe " " ar re saoz (daou-soc'hoù ha daouskilfoù), ha „, ar re alaman. Pere a zo gwelloc'h evit ar brezhoneg ? Setu ar goulenn ...

Kudennig ivez gant implij ar skrab a-c'hin, anvet ivez ar c'hwelskilf, pa vez lec'hiet an arouezen-mañ e penn ur verradenn : 'mañ, 'zo, 'n, 'vidon, ... e-lec'h 'mañ, 'zo, 'n, 'vidon da skouer. Dibar eo ar fazi lizherennerezhel-se eus un destenn bizskrivet dindan *Microsoft Word* ...

Adal ma vizskrivit testennoù e brezhoneg dindan an arload-se eo ret kefluniañ da gentañ an « *options de correction automatique* » adalek lañser « *Outil* » ha nullañ furmaozañ emfiñv ar c'hlochedigoù. Kavet e vez ivez ar fazi-se a-hed « *Yezhadur ar brezhoneg a-vremañ* » gant *F. Favereau* hag e-barzh kalz a levrioù nevez all ...

Evel ma implijit ar c'heweriañ testenn *Microsoft*, war ar seblant, e rankfe bezañ dedennus evidoc'h ar c'heloù-se : bez'zo un difazier reizhskrivadurel hag ereadurel nevez evit ar brezho-

neg. « *An Drouizig Difazier* » eo anv ar meziant ha digoust eo evit an holl !

Mont a ra en-dro gant *Microsoft Word 2000/2002/2003* dindan *Windows* (an holl broduioù adalek 95). Anavezout a ra bremañ 870000 stumm ar brezhoneg peurunvan, ar pezh a zo 50000 pennger. Ouzhpenn tra emañ barrek da ziguzhat ar fazioù kemmadur, adalek an eil furn (miz Eost 2003).

Ar gevredigezh wenedat *K.A.D. – Korvigelloù An Drouizig* he deus krouet ar meziant-mañ a werzh ivez, dre lizher, ur c'hlavier C'HWERTY graet a-ratozh evit bizskrivañ e brezhoneg gant un urzhiataer PC.

Reizhet eo ar c'hlavier-se diouzh ar c'hlavier gall AZERTY. Kinnig a ra ouzhpenn peder stokell ñÑ ùÛ c'h/C'H/C'h ch/CH/Ch hag e ver arouezennoù tiredet ar yezhoù keltiek all. E-mesk anezho e vez kavet ar c'hembraeg (ŵŴ wŴ yÿ yÿ) pe c'hoazh an iwerzhoneg ofisiel (áÁ éÉ íÍ óÓ úÚ).

Meret eo ivez gant ar benveg-se arouezennoù-diforc'h all hag a zo rekis evit skrivañ e meur a yezh europat (e galleg da gentañ...) ar pezh ne ra ket mat ar c'hlavier gall AZERTY. Moulet eo penn-da-benn e brezhoneg holl stokelloù ar c'hlavier-se, 40€ eo ar priz, + 7.6€ evit ar mizoù-kas erbediñ.

Evit goût hiroc'h, kit da welet ar chomlec'h internet <http://www.drouizig.org/drouizig/> pe kasit ur postel da drouizig@drouizig.org.